



Ti-Mamm-Doue, Kerfeunteun. Aman eo a teskas an Tad Maner ar brezoneg dre vuzud.

BLEUN-BRUG

Niv. 98 (Mizieg-Mensuel)
Koumanant - Abonnement : 500 fr.

EBREL 1957

TAOLIT EVEZ MAD

Kasit 500 lur (600 lur kourm. a enor — 1.000 lur kourm. madoberour) da :

Bleun-Brug, 21, rue Jos. Doury, Nantes.

C. C. P. 1541.90 Nantes.

Kas ar skridou da : Abbé Bleunven, curé Saint-Renan (Fin.).

Mar fell deoh beza ezel euz ar Bleun-Brug pe rei deom skoazell, kasit ho skodenn da :

V. Seite, Bleun-Brug, Châteaulin, Finist.,

C. C. P. 544.22 Nantes.

Ezel : 500 lur. — Madoberour : 1000 lur.

TAOLENN

War-du Pask, gand L. B.	1
Pedenn veur an Iliz	2
Ar bez digor, gand J. S.	4
Dorn-skridou ar Mor Maro, gand V. Favé	6
Er harr bourdet, gand Anton Morvan	9
Pinvidika bro ar bed, gand J. Tricoire	10
Sivi Plougastel, gand Yann Gorriggan	12
Du ha Duig Vigneul, gand Ma ban Dig.	14
Mond pell gand nebeud a « esañs », gand J. Tricoire	17
Tañzor ar brezoneg beo, gand V. Favé.	18
Amzer da zond ar besketàrèz, gand Anton Puih.	20
Liziri	21
Keleier	23

DISKOU BREZONEG

Kanerien Landi a embann, da heul an disk braz diweza o-deus embannet : 6 KANTIG EN EUN TU, 6 KANAOUENN EN EUN TU ALL, eul levrig, ennañ ar hantikou hag ar hanaouennou-se, e brezoneg hag e galleg. Setu eun nevezenti pouezuz hag a blijo. Goulennit raktal an disk-se, dija gand e eil mouladur, digand an Ao. Abjean, vicaire à Landivisiau, Finistère. Goulennit da heul roll an diskou all bet savet gantañ.

133847

WAR-ÐU PASK



Distroet eo an nevez-amzer !

A beb tu, bremañ, e labourer stard er parkeier.

An erer o-deus da genta digoret an douar. War o lerh, an ogedou, an ivinou houarn, a ya hag a deu evid hen drailha, her brevi, hen netaad, evid hel lakaad e stad da zegemer ar greun, dibabet e-touez ar re yac'ha.

« Perag, a layaro eur glapezenn bennag euz kêr, en em skuiza, en em zifreta kement-all, daoust ha n'eus ket, en had, a daoler en ero, eun nerz vurzuduz a vuhez ? Red eo kaoud fiziañs er vuhez. »

Al labourer douar, eñ, a oar ervad ez eus, en tachennou gounezet, diou vuhez, disheñvel a-grenn : unan birvidig spontuz, n'eus ezomm ebed d'he diwall : hini an treuz-yeot, an askol, an elvezenn ; eben tenerroh, ha bresk, hag a roio magadurez an den. Ar yuhez-se, ken tener, med ivez ken priziuz, eo hini an ed, an avalou-douar, ar rabez... Evid ma tiwanò, ha ma teuo da vad, ez eus ezomm d'he divenn a-eneb ar pez a anv an Aviel, an dréz hag ar spern, da lavared eo, a-eneb al louzeier fall...

Ennom ivez diou vuhez a zo oh en em steki, o hourin an eil ouz eben. Ar genta a zo don ha teo he gwrizioù, atao prest da zével war gorre, bez 'ez eo hini ar garantez evidom on-unan. An eil eo hadenn vihan ar garantez evid Doue, bet taolet en or halon da zeiz or badiziant, hag a zo kizidig, êz da vouga. Hi eo, hag hi hebken, a roio deom eost an amzer da zond.

Poagna a vez greet gand an douar evid tenna frouez mad anezañ. Ne zeller ket evid lakaad arhant braz da brena mekanikou nevez levid e gempenn atao gweloh. Ha piou a hellfe kaoud abeg e kement-se ?

Med amañ ema ar gentel evidom.

An dud, ker fur-ha ken eveziant da zastum madou ar bed-mañ, a zo lezireg da zoursial ouz traou o ene. O ene paour ! Hel lezel a reont da griza, d'en em holei a zréz hag a spern... Ha setu perag he-deus an Iliz savet ar horaiz. He youl eo e teufem oll gwtibunan da ziskenn e diabarz ennom, evid gweled penaoz ez a ar bed gand on ene... Med dalhom soñj, ar horaiz n'eo ket greet hebken evid hol lakaad da ober pinijennou, med dreist peb tra, evid rei tro deom da labourad, da hada, da houennad, a-zevri, douar on ene...

Al labour wirion, al labour a bouez a houlenner diganeom ober, a-benn Pask, eo poagna da wellaad, en or buhez a dud badezet, bruzuna eta chadennoù ar pehed, terri nerz on techou fall, kabestra berroh on youlou direiz. Hag an dra-ze, evid ma hello on eneoù, kouezet enno puiloh komzou Doue, douret ha tommet gand ar hras, dougen, evel an douar kempennet mad, gwir frouez a zantélez.

L. B.

LIDOU SAK

Bemdez e vez moulet kanennoù nevez e galleg hag an dud a blij dezo traou nevez, ar re yaouank dreist-oll. Setu m'e-neus sonjet ar Bleun-Brug embann ivez war follennoù distag *Kanennoù santel*. Diou follenn a beder bajenn pebhini a zo e gwerz e bureo ar Bleun-Brug. Ar genta a zo warni *Pedenn-Veur an Iliz*, savet gand ar Pab Jelaz; toniet eo bet en em doare kaer gand an ao. *Kerrien*, kure Sant Kaourintin e Kemper. An eil a zo warni pevar gantig anavezet, liez-toniet gand G. *Pondaven*, ograouer Sant Kaourantin, liez-toniet evid beza kanet gand lazioù-kana.

Ma kav gwerz ar follennoù kenta-ze e vo embannet re all, a beb seurt, kanennoù koz ha kanennoù nevez. Da heul ema or zonz embann eur rummad all hag a vefe « *Gwerzioù ha Sonioù* ».

pedenn veur an iliz

(Troet diwar ar Pab Jelaz gand V. F.)

- Oll asamblez kanom : Doue madelezuz, selaouit or pedenn.
- An oll :** — Doue madelezuz, selaouit or pedenn.
— Pedom gand eur feiz start, Doue an Tad Eternel,
— E Vab Jezuz-Krist, an Aotrou, hag ar Spered Glan.
- An oll :** — Doue madelezuz...
- 1 — Evid Iliz dinamm an Doue beo, strewet dre ar Bed a-bez, Goulennom grasou Doue puilh ha stank.
 - 2 — Evid ar veleien gouestlet d'an Aotrou, Evid an oll boblou a stou dirag ar gwir Doue, Pedom an Aotrou Krist.
 - 3 — Evid ar re oll a gelenn didamall gwirionez an Aviel. Goulennom furnez divent Mab-Doue.
 - 4 — Evid ar re a jom gwerh a galon hag a gorv, en abeg da rouantelez Doue, Evid ar re a boagn war hent ar zantelez, Aspedom an hini a ro ar spered.
 - 5 — Evid ar re oll a houarn ar poblou evid ma lakaint da rén, al lealded hag ar reiz, Goulennom nerz Doue.
 - 6 — Evid ma teuy deom amzer vad, a beb eil hañv ha goañv, a beb eil heol ha glao, Pedom hag aspedom an Aotrou, Rener-Meur ar bed.
 - 7 — Evid ar re a zigor o spered d'ar wirionez, o halon da hras Doue, Aspedom madelez an Doue Oll-Halloudeg.
 - 8 — Evid ar re a zo c'hoaz nasket gand sempladurez mab-dén, gand gwarizi pe gasoni, gand kredennoù faoz diniver dre ar bed, Pedom Jezuz Or Zalver.

- 9 — Evid on tud dalhet pell diouz ar gêr, evid ar brizonidi, evid an dud gwan 'zo gwasket, an dud just heskinet, Pedom Jezuz Or Zalver.
- 10 — Evid ar Jizevien dianket, an heretiked dihenchet, evid ar bayaned daoulinet dirag doueou faoz, Pedom Doue ar wirionez.
- 11 — Evid ar re a labour da astenn an Aviel, ar re a glev ouz o breudeur reuzeudig, Pedom an Doue trugarezuz.
- 12 — Evid an oll gristenien amañ dastumet, gand feiz ha gand gréd, Pedom an Aotrou leun a hloar.
- 13 — Evid ma vo laket glan or horvou, pardonet or pehejou, Pedom hag aspedom an Doue a vadelez.
- 14 — Evid diskuiz peurbaduz an anaon hag hini ar bastored o deus renet an Iliz katolik, Pedom Roue ar sperejou ha barner an oll dud.

Unan : — Aotrou, plijet, plijet ganeoh rei deom :

An oll : — Aotrou, plijet, plijet ganeoh rei deom :

- 1 — Eur horv mouget ennañ an techou-fall, Eun ene birvidig ennañ ar feiz.

An oll : — Aotrou, plijet...

- 2 — Eun doujañs leal hag eur garantez wir.

An oll : — Aotrou...

- 3 — Eur vuhez gouestlet d'ho trugarekaad, hag eur maro laouen.

An oll : — Aotrou...

- 4 — Eun êl da zigas deom levenez ha peoh.

An oll : — Aotrou, plijet, plijet ganeoh rei deom.

Unan : — Doue madelezuz, selaouit or pedenn.

An oll : — Doue madelezuz, selaouit or pedenn.

Amen.



AR BEZ DIGOR

« Tri dervez goude e varo
e savas beo buhezeg. »

Ar mor a dan, a luhed, tarzet gand eun trouz diaouleg evel eur gorventenn foll, a ya kuit nebeud ha nebeud. Ar hanol ne groz mui. Ar boliji, a zute bremañg c'hoaz, a jom sioul bremañ. Koulskoude, an dachenn, reuglet, mahagnet, rouvennet don gand an obuziou a zo kouezet ken puilh warni, a jom c'hoaz da virvi evel eur mor kounnaret, eur mor sonnet, gand gwagennou heb lusk-dilusk, e-leh ma ne ziskenn netra, netra euz ar pezh a jom war-lerh an drailh spontuz-se. Ar gorventenn, a zo chomet krenn, a ziskouez c'hoaz he dremm kriz, fuloret.

An tonnou ne luskellont mui. O hribenn gourdroutuz ne ziskenn ket evid en em freuza en ero a zo a heb tu, ero an tremenvan evid eur maread a zoudarded a zo o lezel o huanad diweza, e-pad ma savo en o hichen beteg o golei, galv strafuilhuz ar re o-deus esperañs er vuhez c'hoaz.

En eur foz, kleuzet gand an obuziou, eun abardaez, e tigoras Yann-Vari e zaoulagad, daoulagad glaz gand malvennou melen. Sebeliet beteg e skoaziou dindan douar ar hleuz dizahet warnañ, edo a-stok e gorr, e zremm troet war-zu an neñv, evel ma vefe o horloz ar varn diweza.

Selled a reas, mantret, hag e welas kement a stered en noz du, ma kredas beza taolet en eun islonk.

Goude ze, e santas an avel fresk o tremen war e dal, gleb gand an derzienn. C'hwez kreñv ar fank a zeuas beteg e fronellou. Merzoud a reas neuze, gand anken, gand glahar, edo e izili prizoniet en douar. Seblantoud a ree dezañ kaoud eur horv divent. Eur hoan skrijuz a lakee an dour da ruilh war e dal : eur menez a voustre dezañ e vruched ; e dreid a oa an tan beo enno, pell dioutañ, pell, pell, e kreiz an douar.

Klask a reas youhal. Eur glemmadenn druezuz a zeuas euz e hornailhenn, med evit chom kentoh eno heb gelloud sevel uhellou.

« N'em-eus nerz ebed ken, a huanadas eñ, arabad din en em skuiza, gedom. »

War evez, e-kreiz sioulder an noz, e talh e zaoulagad troet war-zu an neñv. En dro dezañ, an deñvalijenn a jom heb eur finvadenn, heb mouez, heb trouz. Ar stered en em roas da grena a-uz dezañ, da zañsal evel m'o-defe c'hoant diskenn beteg ennañ gand truez outañ.

En eun taol, unan anezo en em zistagas euz ar volz teñval evid dond da goueza en toull m'edo. War he lerh unan, diou, teir all... Erfin, e lugernent oll, stok ouz e zremm, ken tost, ken skeduz, ma rankas serri e zaoulagad o trelli.

Hag e soñjas kousked. Med gand an derzienn e teuas dezañ eun huñvre.

Soudarded yaouank, e gamaladed, a rede en e raog, war e lerh, a heb tu dezañ. Eñ ive a yee diwar err heb selled en e raog, gand e oll nerz evel ar re all. E dreid skañv evel diouaskell a stoke a-veh en douar. Nijal a ree kentoh. Youhadennou e peb tu « war raog ! » Ha neuze, avad, ne veze ket klevet ar boliji o sutal, ha neuze ez eed atao war raog heb en em jala tamm, koulz lavared, gand ar re a goueze en hent, a goueze ken puilh koulskoude. O ! koueza a ree soudarded ! Yann-Vari ne helle ket o honta, o anavezoud. Dremm meur a hini, koulskoude, n'oa ket dianav dezañ.

Unan e-noa digoret e zivreh evel m'e-nije c'hoant briata an douar a-bez. Eun all e-noa en em daolet war e gein, eeñ tenn evel eur plankenn. Lod all a zeblante azeza ; nerz ebed mui, o fenn stouet war o bruched, o klask war an hent euz peleh e teue ar houder ruz a rede dindanno. « War-raog ! war-raog ! » Gand pebez lamm, eh en em daoled laouen e foz an enebour ! Med goude ze... goude ze, eun trouz spontuz, safar ar gurun, an er, tro-dro, o voudinellad e-pad hir amzer... Goude... Yann n'e-noa soñj mui euz netra, nemed e tihun

bremañg, sabatuet o weled edo c'hoaz e buhez, sebeliet en eur bez digor.

Digeri a reas a nevez e zaoulagad. Teñvalijenn an noz a yee war sklerraad, ar stered a gerze pell dioutañ en neñv.

« Pa vo deiz, emezañ, e teuint d'am herhad. » Gortoz a reas an deiz. E weled a reas o sevel hag en dremmwel ar sklerijenn o para nebeud ha nebeud : goulouig an deiz. Eun dervez disliou, heb eur banne heol. Glao a rañke koueza nepell euz eno, rag êzenn ar heure a zegase ganti c'hrwez gleb. Evel ma vije deuet adarre war he giz, mintinvez kañv an dervez tremenet, an hini he-doa gwelet o vervel kement a zoudarded, a rede d'ar stourmadenn.

« An dra-ze ra eur pennad mad a amzer m'emaon amañ. Dond a raint dizale d'am herhad. » Gervel, gervel a reas, gand eur vouez klemmuz karget a esperañs, unan euz kravatañrien e gompagnunez, eur beleg, bleo gwenn dezañ, a yee aliez da gerhad ar paour kêz soudarded gloazet, beteg dindan ar mindrailh. « Hennez am havo, am zaveteio, ya, hennez ! »

Koulskoude... an deiz a dremenaz er sioulder... evel an noz. Hag adarre, dindan sell ar stered, ar Breizad a oe war hed euz distro tarz an deiz. En dro-mañ, eh en em ziskouezas evel ma vije evid atao treh d'an deñvalijenn. Ban-nou aour ar sklêrijenn a dreuzas en eun taol trumm an noz, a skedas, o lezel an neñv goude ze beuzet oll e glaz-mor lugernuz.

Ar Breizad yaouank a welas gand laouenidigez liou kaer an oabl, liou mor braz e vro ; ar frankiz heb douetañs a dostee outañ...

Ar serr-noz a deuas, an deiz a varvas, na beleg gand e vleo gwenn na deuas, na den ebed, da zelled er foz.

Ha pas zeuas an deñvalijenn d'e holei, Yann-Vari a zantas o tilezel anezañ an Esperañs sanket ennañ evel e ene en e gorr a ugent vloaz.

« Tri dervez 'zo emañ amañ, va lezel a raint marteze da vervel. »

Mervel ! ar soñj-se a deuas en e spered ken prim ma ne reas mui van ouz e boaniou. Enkreiz ! an iver ! ar baradoz ! a enkas neuze e spered, e galon. Hag e stagas da lavared pedennou, ar re oll a anaveze. « On Tad a zo en neñv... Me ho salud. Mari... » desket gwechall war barlenn e vamm.

E vamm ! e-pad ma tibun e bedennou, e seblant dezañ he gweled, he hleved en e gichen. Hirio, emañ du-hont er gêr e Breiz-Izel, o pedi ar Werhez evid he mab, evid ma echuo al lazêrêz-se.

E spered a zo nijet da Vreiz-Izel. Dirazañ, eun daolenn euz an amzer gwechall. Evel ma vefe e zaoulagad o para e gwirionez, Yann-Vari a wel e vammig, gand he zavañcher kaer a zul, he hroaz aour en-dro d'he gouzoug, p'he-doa c'hoaz bleo fonnuz dindan he hoof brodet, pa gane gand eur vouez skintin ha laouen :

*War dal ar bed an heol a bar
hag a strew eur splannder dispar :
da vintin Pask, goude tri deiz,
eo savet Jezuz euz ar bez.*

Tri dervez ! eveldon me, a zoñjas or Breizad. Pa ne oar mui pedenn all ebed, e stag da gana gand eur vouez tohor an diskan-ze a zegaso marteze dezañ ar housked.


Ha setu eur strollad soudarded o tond, bet o touara korvou maro chomet astennet war an dachenn dilezet. Chomet int krenn hag e selaouont a-dreuz an deñvalijenn.

« Ouspenn re varo 'zo amañ, m'eus aon, a lavaras unan anezo. Selaou ar glemmadenn a zav euz eun toull. »

Heñchet gand ar vouez, n'o-deus ket ezomm da glask e-pad pell amzer, evid savetei an hini a oa oh alteri e-mesk eur hantik a joa, a vuhez :

*War dal ar bed an heol a bar
hag a strew eur splannder dispar :
da vintin Pask, goude tri deiz,
eo savet Jezuz euz ar bez.*

J. S.



Dorn-skridou ar Mor Maro

Abaoe eun deg vloaz bennag a zo, ez eus ano kenañ euz *Skridou ar Mor Maro* pe skridou *Qumran*, diwar ano al leh m'in bet kavet, pe hoaz *Ain-Feshkha*, diwar ano eul leh all, tost-tre da *Gumran*. Sonjet on eus e plijfe d'on lennerien gouzoud hirroh diwar-benn ar gudenn-ze.

War riblou ar Mor Maro.

P'on bet oh ober va 'felerinaj en Douar Zantel, on eus treuzet bro al Liban, ar Syrie hag en em gavet er Jordanie.

Mond a rejom war eeun beteg ar menez Nebo eleh ma varvas Moïzeze goude beza gwelet oh en em astenn dirazañ ar Mor Maro — e-harz ar menez — ha pelloh an Douar prometet en he fez. Treuzet ganeom ar Jourdin ez ajom da loja da Jeriko.

Divizet e oa mond antronoz beteg ar Mor Maro ha beteg ar heviou (grottes) a oa bet kavet enno dorn-skridou koz, eur gavadenn a briz bras.

Setu ni en em gavet war ribl ar mor, 75 kilometr hed he-deus ha 16' treuz en he lodenn ledanna, 392 metr izelloh eged ar mor braz emao, tomm ha bah eo an amzer; ablamour da ze ha daoust da va skuizder n'am-oa ket kousket kalz en noz araog. Lod ahanom a ya da neuñv er mor; ponner a halenn eo an dour, c'hwero a vlaz; êz eo chom war an dour d'an neb a zo boazet da neuñv er mor braz; nebeud a houd a zo avad da blonjal ar penn en dour rag druz eo ha dem-hluddeg, ken na vez red mond goude-ze d'en em walhi el « lido » a zo e-kichen, araog en em wiska endro.

Diouz tu Jeruzalem emao, da lavared eo diouz tu ar huz-heol. Hed-a-hed d'ar mor ez eus evel tornaodou a yelo goudeze ha pelloh da ober menezioù Juda, seh ha gouez; beteg 300 ha 400 metr e sav an tornaodou-ze, krenn ha

krenn aliez. A vare da vare, stank, ez eus keviou war gostez an tornaod, keviou a heb ment, diêz tre mond beteg enno. Ar hirri a ya a dreuz eun doare kompezenn etre ar mor hag an tornaod, daou gilometr ledander dezi, gand hen-chou (!) distrantel, kamm-digamm, o tehed diwar sterouigoù ha poullou. Polised arab a ya en on raog evid diskouez deom an hent hag ive evid « heilha » warnom, rag tost-tre emao ouz douarou an Israelianed; divenn on-do zoken da vond beteg Ain-Feshkha, tostoh hoaz. Goude beza greet diou leo vad a hent eh en em gavom el leh anvet *Qumran*, tremenet om hebiou da *Khîrbet Qumran* (Khîrbet a dalv evid lavared « dismantrou ») ha setu ni dirag ar heviou en tornaod. Lod ahanom a gredo krapa beteg ar heviou, lod all a jomo er Khîrbet.

Eur gavadenn vuzuduz.

E miz Meurzh 1947, eur paotr-dened « bedouin » o klask warlerh eur haor zianket a gouez dirag toull eur hev hanter stanket. Mond a ra ebarz netra nemed evid gweled, hag e kav, war strad ar hev eun nebeud priaj drailhet hag lod podou pri uhel, enno unneg rollad lèr, gwisket gand eul lienaj coliet ha koaret evid o mired. Petra 'oant? dornskridou koz hebreeg, warno pennadou euz ar Skritur Zakr. Ne lavaran ket penaoz e kavas paotr an deñved tro d'o gwerza, lod da eskob kouent Sant Mark e Jeruzalem, lod all da Amerikaned. Goudeze, o weled talvoudegez ar gavadenn e oe furchet gwelloc'h an holl geviou ha kavet hoaz a heb seurt dornskridou, lod war papuruz, lod all zoken war rolladou arem merglet ha debret, evel just, gand an amzer. Eur rollad arem am eus gwelet, evel-se, e mirdi Rockefeller e Jeruzalem; diêz kenañ e vo da zirolla heb e vrevi hag heb ma kouezfe e poultrenn med kavet ez eus dija, tro d'henn ober evid re all en Amerik.

Euz a beleh e teu an dornskridou-ze?

Eur gavadenn vuzuduz am eus lavaret, ha gwir eo. Unneg rollad en o 'fez, pe dost, ha tammou euz lod all, kalz pe nebeud euz hanter kant dornskrid pe evel-se. Da genta daou zornskrid euz *Izaiaz* en e bez, miret mad kenañ. Tammou euz levrou all euz an *Testamant Koz* ha euz an *Testamant Nevez* zoken. Lod skridou all ha n'emaint ket war roll al levrou-sakr digemeret gand an Iliz.

Euz a beleh e teuont? Hanter hent etre ar heviou hag ar mor e oa eun dorgenn goz, eun doare « tell » bihan, anvet *Khîrbet Qumran*. N'oa ket bet furchet biskoaz: a gañcho ez eus « tellou » evel-se dre ar vro! Pa oe en em gemeret outi, e oe dizoloet dismantrou eur gouent, eleh ma vev gwechall menel yuzeo, marteze euz urz an *Esenianed* (Esseniens), ano anezo gand istourien koz evel Pline l'Ancien, Philon d'Alexandrie ha Flavius Josephe. N'oa ket kambrou bihan evid loja peb-hini, — ar veneh a loje er heviou tro-war-dro, — med kambrou braz evid ar bodadegoù, evid dibri, eur gambr da skriva — gwelet am eus e mirdi Jeruzalem an doare taoliou a zervije dezo evid skriva al levriou sakr — kambrou evid gorren ar boued ha traou all, ha dreist-oll evel poullou mansonet, ré vraz ha ré vihan, da zerhel dour hag a zervije d'en em walhi (piscine), diri da ziskenn enno. An emwalhi a oa eun doare lid evito. Tost tre d'ar gouent ez eus bet kavet relegou en douar, ar vered eo a oa eno.

An dornskridou a zo levraoueg ar veneh bet kuzet ganto er heviou araog tehed kuit euz ar gouent gand ar zonz d'o havoud endro pas zistrojent. Diouz an dra-ze ez eus gallet gouzoud pegeit 'zo ez int kuzet.

A-unan emañ an oll evid lavared int bet kuzet wardro ar bloavezh 70 warlerh donedigez *Or Zalver*. Setu amañ perag.

Er bloavezh 64, ar yuzevien skuiz gand gwaskèrèz ar Romaned, oh ober o mestr war ar vro, en em zavas a eneb dezo. Wardro 68, soudarded Vespasian, impalaer Rom a zistrujas kêr Jeriko, tost da Gumran; er bloavezh 70, Titus, mab Vespasian, a gemeras Jeruzalem hag a zistrujas an Templ. Er bloaveziou-ze eo e tehas ar veneh; goude beza kuzet o levriou er heviou, dastumet brao e lienaj koaret ha lakeet e podou pri.

Peseurt talvoudègèz o deus an dornskridou ?

Pa vez kont euz levriou bet savet en amzeriou koz, e heller atao lavaret : daoust hag al levr, evel m'emañ bremañ en or herz, n'eo ket bet re zistreset an tamm anezañ, dre forz beza eil-skrivet a hed ar hantvejou ? distreset heb gouzoud deor awechou dre zievezder ; distreset a-ratoz kaer, hirreet pe verreet, evid plega da gredenn pe gredenn ? Daoust ha n'eo ket bet ijinnet en e bez pe eul lodenn anezañ ha lakeet war ano eun den kalz kosoh, evid rei dezañ muih a bouez hag a levezon ? Kredi a hellit ez eus bet klasket afer ouz leoriou ar Skritur Zakr war ar poent-se hag ez eus bet ranket o divenni.

Beteg-henn, evid an Testamant Koz, kosa dornskrid on-oa a oa bet skrivet wardro ar bloavez mil goude donedigez Or Zalver. Setu *tost da vil bloaz gonezet d'an nebeuta* : rag mar deo bet *kuzet* an dornskridou wardro ar bloavez 70, ez int bet *skrivet* araog, evel just, marteze kant vloaz, marteze ouspenn, a-benn eun nebeud amzer amañ e vezo gouezet en eun doare klokoh. A-benn bremañ dija war lod rolladou parch bet raklet ha eil-skrivet warno e kaver skridou kosoh, 500 vloaz, ha beteg 800 vloaz araog donedigez Or Zalver. Diouz an doare lizerennou implijet ha diouz traou all hoaz eo ez eer d'an dornskridou evid klask barn o hozni. Seulvui e vez koz an dorn-skrid ha seulvui e vez tost d'an oberour, seul nebeutoh a ze a dro a zo bet d'e zistresa. Bremañ e vo gelllet komparachi al levrou Santel en doare m'o lennom en deiz a hirio hag en doare m'oant skrivet daou vil bloaz 'zo. Lavarom dioustu n'on eus aon ebèd da gaoud : dre hraz Doue, n'eus kavet netra hag a hellfe teurel douetañs war al levriou sakr ; miret int bet didamall a dreuz ar hantvedou. N'eo ket souezuz avad pa zonzjer int bet eil skrivet gand tud santel, leun a zoujans evid al levrou-ze, goude beza pedet hag aliez war o daoulin.

Mad e vefe deom ive gouzoud penaoz eo deuet beteg ennom levriou koz all evit gelloud barn gwelloh priz ar gavadenn. Evid al levriou lennegel skrivet e latin pe e gregach n'eus ket nemeur a zornskridou hag a zeufe an tu all d'ar bloavez mil goude donedigez Or Zalver, lod a zo en tu-mañ zoken. *Euripide* a zo euz ar V^{et} kantved araog Or Zalver, an dornskridou kosa on-befe euz e oberou a zo bet skrivet *1300 vloaz goude m'int bet savet*, *Catulle*, 1500 vloaz, *Platon*, 1300 vloaz, *Horace*, 900 pe 1000 bloaz. Viz-a-viz d'ar skridou lennegel latin ha gregach, dornskridou ar Skritur-Zakr kavet e Quimran a zo kalz tostoh d'an oberour.

Meur a vloavez a vo red evid studia piz an dornskridou-ze ha tenna anezo a beb seurd menozioù talvouduz.

Ar skridou all, ha n'emañ ket war roll al levrou sakr a vo talvouduz ive, evel psalmou. A-dreuz meneh Qumran e welom eun tammig sklerroh e buhez ar yuzevien da geñver donedigez Or Zalver. Pa zonzjer ez eus tost da 500 vloaz etre leoriou Esdras ha Nehemi ha leoriou ar Vakabeaned, 500 vloaz heb gêr er Skritur Zakr diwarbenn istor ar Yuzevien, e kavom brao kaoud amañ ha pa ne vefe nemed bannou dister a sklerijenn. Lod traou a zo en Aviel hag a vo èsoh deom o hompren.

Peb tra a zeu d'e boent ; lavarom bennoz da Zoue da veza permetet ar gavadenn-ze ; evid e vrasa gloar e vezo, n'om ket nehet.

V. Favé.



er harr bourdet

Dre un anderù tuemm a hourhelen,
édan un heol plom,
ur jau tred ha pousiù
e denn, diéz-mad,
ur harr ponnér karget a vein.

Er chartour, ur peur-keh dén koh,
e geje é nerh get hañni é jau [det.
aveid asé tennenn ag en anrod er har bour-

Er peur keh lon,
é benn izél,
é gestad a-huél,
é lienn-gein bloset get er harnes,
e astenn e vuskleu,
e glask krogein é doar distrampet...
ha deuto d'e nerh,
n'arrit ket a voutjal d'ur med
er garg ré bonnér
aveid é vambreu distér.

Er mestr, chuéh, èl er lon,
get labourieu é pad hir bléieu,
e grog ér rod,
ha dré ur boutad nerhuz,
e lam é avé
ag en anrod.

Més er grapenn a-blom,
en hent skoselleg ha riskluz,
en tuemmdér,
er garg ré bonnér,
e zo kriùoh eid en dén hag er lon.
Er jau eh arrest.
En dén koh e gemér fonnabl
ur mén braz
hag e vourd rod er harr.

E lakad é vréh
en-dro de benn trempet
er lon é huizein,
er chartour e ro dehon
dorlotenneu amiabl,
én ur lared
konzeu karantéüz.

Er mestr er gronn a zoursi,
e vros kostérieu chumenneg,
diùhar fangeg er jau,
e zoub un tamm lien én ul lomm deur
hag e holh bléseau
goleit a hoed
deuhlin ha kein er lon.

Più e jomehé digas
é huéled
un dén koh
hag ur lon
é poentein ar en hent bouilhenneg ?

ANTON MORVAN. 13/5/54. (bet e skol gristen Baod, Morbihan).

ar harr sac'het

D'eun abardaez a viz Gouere,
dindan eun heol plom,
eur marh treud ha « pousif »
a denn, diéz tre
eur harr pounner karget a vein.

Ar charretour, eur paour den koz
a lakee e nerz gand hini e varh
evid esea tenna euz ar rolleh
ar harr sac'het.

Ar paour kèz loen,
e benn izel,
e gostezennou a-wel,
e lienn-gein blofiset gand an harnes,
a astenn e « vuskloi » (gigennou)
a glask kregi en douar distrampet...
ha daoust d'e nerz,
ne hell ket boutjal d'eur meud
ar garg re bounner
evid e « vemprou » (izill) dister.


Ar mestr, skuiz 'vel al loen,
gand labouriou e-pad hir bloaveziou,
a grog er rod,
ha dre eur voutadenn nerzuz
a lam e sternad
euz ar rolleh.

Med er grapenn a-blom,
en hent skoselleg ha riskluz,
en tommdér,
ar garg re bounner,
a zo kreffvoh eged an den hag al loen,
Ar marh a jom a-zav.
An den koz a gemer buan
eur mén braz
hag a zac'h rod ar harr.

En eur lakad e vreh
en-dro da benn trempet
al loen o houezi
ar charretour a ro dezañ
allazagigou karantezuz.

Ar mestr a ra gand evez war e dro,
a vroust kostezioù skumenneg (eonnenneg),
diouhar fangeg ar marh,
a zoub eun tamm lien en eul lomm deur
hag a wadh e houlloù
goloet a wad
daoulin ha kein al loen.

Piou a jomfe digas (dizeblant)
o weled
eun den koz
hag eul loen
o poania war an hent leun a voutilhenn ?



Pinvidika bro ar bed

Brezoneg êz da lenn.

Ar pennad-mañ a dle beza komprenet gand ar vrezonegerien euz n'eus forz peseurt Korn-bro. Lakit an dud diwar ar miz d'e lenn. Eüruz e vim da gaoud ho soñjou diwar-benn kement-se.

E pe leh ema pinvidika bro ar bed, d'ho soñj ? E-barz an Amerik ? N'ema ket. E-barz ar goueleh, ne lavaran ket. Ya, e-barz an dezerz. Hag e-barz an dezerz sec'ha ha tomm. E pe leh eta ? E-barz ar Sahara ? N'eo ket. (Eno e vo, a-benn deg vloaz amañ, marteze...) Na glaskit ket pelloh. Setu : e-barz Koweit. Ha Koweit eo ar vro zec'ha ha tomm an douar ? Moarvad. E-barz goueleh ar Siri e vez gwelet kañvalet (chameaux) ha bandennou deñved o peuri eun nebeud plant treud ha dreineg. E kreiz goueleh Koweit, avad, n'eus plantenn ebéd. N'eus mên ebéd, kennebeud. Trêz, sabl) zo, avad. Tra ebéd nemed trêz. Trêz tommet gand an heol griziaz. Hag eur gwrez (eun tommder) spontuz ! Hanter-kant derez (50°) e-barz an disheol, e-pad miziou an hañv. E-kreiz ar goañv, ne vez ket kalz distannoh.

Neuze, seurt bro a dle beza an hini baourra er bed ? Ar baourra eo bet, e gwirionez. Nemed, abaoe ma oe lakeet an Anglo-Iranian C° da dehouit kuit euz Bro-Iran, gand Mosadeg, paourra bro ar bed a zo deuet da veza ar vro binvidika. Rag, paotred an Anglo-Iranian C°, kaset kuit euz Bro-Iran, a zo deuet da gleuzia puñsou petrol e-barz Koweit (lavarit : kwet).

Koweit a zo eur vro vihan, bihannoh egéd Breiz. Renet eo gand eun Emir. Hag eno, evel én oll vroioù arabeg, an traoù kuzet e-kreiz an douar a zo d'an Emir, ha dezañ hebkén. An Emir an hini eo, eta, a zo perhenn ar petrol.

Ne oa nemed pemp mil den o chom e Koweit. Med, breimañ, ez eus daou hant hanter-kant mil den o veva eno. Ar Zaozon eo a hourhemenn, a-benn ar fin, peogwir ez int kalz stankoh egéd tud ar vro. Evel just, an Emir a gav dezañ eo- en mestr e-barz e vro. Rouanez Bro-Zaoz ne ra kén nemed « gwarezi » anezañ, ha n'eo ket gourhemenn dezañ. Nemed ne hall den ebéd mond da jom e-barz Bro an Emir heb kaoud « visa » ar rouanez Elizabeth. Koulskoude, an Emir an hini eo a douch arhant ar petrol, rag, an eoul-douar a zo e dra, ha tra den all ebéd. Eñ a bê an 250.000 den a zo o chom én e vro. Ha péa mad a ra anezo, peogwir n'eus bro all ebéd, e leh e vez gounezet kemend-all a arhand gand an dud.

Med, n'eus ket nemed an arhant a gont war an tamm douar-mañ, dreist-oll pa ne vez nemed trêz bero dindan ho treid ha tro-war-dro. Gwir eo. Med, renket mad eo bet peb tra e Koweit, evel m'emaoh o vond da weled.

Kêr-benn ar vro eo Koweit, eur porz-mor arabeg, war ar pleg-mor perseg. En dro d'ar gêr-goz, ez eus bet savet eur vogger, gwechall. Gand pri eo bet savet, pa n'eus mên ebéd ér vro. Setu perag ez a ugent santimetr adouar kuit gand an dour, pa vez eur gaouad glao. Dreset e vez ar vogger beb tro, avad. An Emir ha pennou braz ar vro — tud euz familh an Emir — a zo o chom e-kreiz ar gêr-ze. Eur gêr nevez a zo bet savet ive en tu all d'ar vogger zivenn. Ha tud a beb seurt a zo o chom eno : Kenwerzerien (koñversanted) euz Bro-Ziri, Bro-Liban, Bro-India, Bro-Chin. Ar vicherourien a zo Persaned. Ar vekanikourien a zo Armenianed. Med eur skol hag eun ospital modern-kenañ (giz Bro-Zaoz) a zo bet savet e Koweit. Hag e vezer skoliatet ha louzaouet evid netra. Ar vistri-skol hag ar vedisined a vez pêet gand an Emir — diwar ar petrol — evel oll dud ar vro.

Tud Bro-Europ, n'emaint ket o chom e-barz Koweit. Eur gêr nevez a zo bet savet ganto, hanter-kant kilometr pelloh. Gwelloc'h eo e-giz-se evid an oll. Kêr an Europeaned a zo unan iskiz, avad. *Ahmedi* a vez greet anezi. Tier *Ahmedi* a zo izel, eur bladenn houarn ront war lein peb hini. Heñvel a-walh ouz barra-kennou da lakaad binviachou ar zoudarded. N'eus forz ! *Ahmedi* a zo nêt ha didrouz, enni peb ézantant modern : tachennou sport, tier c'hoariva (teatrou), sinema, skoliou, staliou boued, hag ive ilizou, peogwir ez eus katoliked vad o chom eno.

A zo kaer ! Med, gand gwrez ar vro, ne dle ket beza brao-tre beva eno, a zoñjit-hwi, marteze. Mad ! Koulz e-barz ar gêr arabeg hag e-barz ar gêr european, ér an tier a vez dalhet atao na re domm na re yen. Ya, freskeet e vez an êr, a-hed ar bloaz, da vired ouz an tier da veza re domm. Ha koustuz eo kement-se ? N'eo ket re goustuz, pa n'euz nemed devi (loski) petrol evid lakaad ar skornéréz da vond en dro ; hag an eoul-douar ne goust netra, koulz lavared.

Kaoud ér fresk a zo mad. Kaoud dour dous a zo red, avad. Hag e-barz ar vro a-bez, ne oa nemed eur feunteun o rei dour a-walh evid terri o zehed da zeg den bennag bemdez ! Pa ne oa ket kalz tud e Koweit, e veze dégaset an dour gand kamionou sitern. Euz Bassorah e teue an dour-ze. Ha ma vije deuet tud. Bassorah da naha rei dour, eun devez bennag ?... Gwelloc'h kavoud dour e-barz ar vro. Ar petrol e-neus permetet an dra-ze ive. Gantañ e vez strilhet (distillet) dour ar mor. Ha peogwir ne jom tamm holen e-barz, e vez divlaz awalh an dour strilhet-se. Red eo lakaad eun tammig holen e-barz endro, evid rei blaz dezañ. Biskôaz kemend-all ! Tenna an holen kuit diouz an dour sal, ha lakaad holen e-barz adarre ! Koustuz-mad eo ive ; med, n'eo ket an eoul-douar a vank da domma an alambig d'ober dour dous, hag ouzpenn dour, e vez grêt holen. A zo gwelloc'h, an ézenn dour a vez lakeet da labourad, araog mond da zour en eur yennaad. Ya, lakeet e vez an ézenn da gas turbinou en dro, d'ober an elektrisite evid ar gêr a-bez ! Ijinuz eo : dour, holen hag elektrisite, war eun dro.

Peogwir ez eus dour, e haller, moarvad, lakaad eun nebeud plant da greski ? Tamm ebéd. N'eus plantenn ebéd ér vro. An tomatez hag an avalou-orañjez a vez dégaset euz Bro-Liban, dre garr-nij. War nij, ive, e teu ar fleur euz Bro-Holland. Ar re-mañ a vez miret e-barz ar skornéréz, ha lakeet da ficha an daol nemed e-pad ar prejou. E-giz-se, e padont diou zizun bennag, e leh tri pe bevar devez, e mod-all.

Ha setu penaoz eo deuet paourra bro ar bed da veza an hini binvidika ha moderna. Ne gav ket din e ve an hini blijusa, daoust da ze. N'eus forz penaoz, seurt burzud ne bado ket pelloh egéd ar mamennou petrol. Hag, ar puñsou eoul-douar a yelo da hêsk, deiz pe zeiz. Ha neuze, Koweit a deuo da veza ar goueleh adarre. Lezenn an dezerz an hini eo ive. Kêrioù braz a zo bet gwechall ennañ, dismantret abaoe pell zo. Da heul Palmyr e chom peulioù mein. Da heul Petra e chom templou alaouret. Petra a jomo da heul *Ahmedi*, a-benn pemp kant vloaz ? Mogerioù simant-houarnet ha pennadoù korzennou.

Doktor J. Tricoire.

SIVI plougastel

Pell zo abaoe. Lenig, eur verhig 12 vloaz, a oa bét war ribl ar mor, el leh m'en em daol ar Ster-Aon e Lenn-Vor Brest. He mamm-goz a oa o chom eno en eun ti bihan, hag he zad, eur moraer, a stage e vag demdost d'an tiig, pa deue euz al Lenn-Vor, leun e rouejou.

Tost oa an noz. Ha Lenig a gerze drant dre ar gwenojennou. He zavañcher glaz, he zae voug hag he hoefig gwenn gand daou las dantelez o hournijal en dro d'he fenn ha d'he bleo alaouret a ree eun daolenn zudiuz da weled e-touez ar brug e bleuñ. Beb an amzer, Lenig a gutuilhe unan euz ar hleierigou ruz. Dija he doa eur boked en he dorn.

— Bremaig e lakin va boked dirag skeudenn ar Werhez, peogwir emañ Miz Mari, a zañje Lenig.

E gwasked eur hleuz, Lenig a gavas sivi gouez. Lenig a gave mad ar frouez bihan-se ! Setu hi puchet o tastum ar sivi ruz. Dre ma vezent distaget diouz ar bodennou, ar boulou ruz a veze sunet gand muzellou livrin ar verhig. C'hoarzin a ree Lenig ! Heb ehan e selle e ndro dezi da glask sivi-all c'hoaz ! Hag e tebre kement frouezenn a wele !

Med Lenig a zonzas oa poent dezi dizrei d'ar gêr da zikour he mamm. Eur zell a reas ouz ar mor braz. An heol a oa izel war an dremmwel. Dirazi, Gourenez Kraon a oa beuzet en deñvalijenn, oll nemed reier Kelern. Ruzder ar pardaez a lakee ar mor da lintra.

— Pegen kaer eo béd an Aotrou Doue ! eme Lenig en eur astenn he daouarn warzu ar huz-heol, ar boked bleuñ brug en he dorn.

Liou ar mor a jeñchas : dond a reas da veza ruz-du.

Memez liou gand ar bleuñ brug ! eme Lenig.

Prestig ar mor a deuas ruz.

— Memez liou gand va zae ! Na me a garfe mond bemdez da eul an heol o kuzad ! eme ar verhig en eur c'hoarzin.

Lenig a ehanas souden da c'hoarzin... Chom a reas digor he genou, he daoulagad dispourbellet, he daouarn astennet, epad ma c'houeze sioul an avel-vor an dro dezi...

Duhont, a-uz d'ar mor, eun intron gaer a dostee buan. Lenig a jome sebezet ! N'he doa ket aon, rag an intron a oa laouen, nag ober a ree sin dezi da jom eno. Lenig a vouse'hoarze d'an intron gaer ! A-benn eur pennad Lenig a houlennas :

— Piou oh-c'hwi, Intron gaer ?

— Me eo Rouanez ar Huz-Heol.

— Perag ho peuz kuiteet ho pro ken brao ?

— Ahlamour am eus klevet ahanout o lavared e karfez dond da vro ar Huz-Heol !

— O ya, sur e karfen ! Med petra lavaro va mamm ha va zad ?

— Re drist e vefent o koll ho merhig Lenig ! Rag-se ne deui ket ganin ! Med lavar din ar pez a rafe muia plijadur dit ha me benn roio dit !

— Sur ? eme Lenig, laouen.

— Ya, Lenig. Ne 'z an morse eneb va ger.

Lenig a groazas he daouarn war he bruched, ar boked brug harp ouz he muzellou. Nehet oa lakeet ar verhig paour : ne ouie ket petra goulenn !

— Goulenn tri zra diganin ! eme Rouanez ar Huz-Heol.

— Da genta, eme Lenig, grit ma vo bepred kuñv ar mor evid pesketourien Plougastel ha ma kavint kalz traou er mor.

— A vezo greet ! eme an intron gaer.

— D'an eil, eme ar verhig, mirit na errufe morse droug ebed gand va zad, va mamm ha va mamm-goz.

— A vezo greet ive ! eme an intron.

— D'an trede...

Lenig a dasas. Sevel a reas he daoulagad warzu an intron en eur c'hoarzin.

— D'an trede ? a houlennas an intron.

— Ne ouezan ket ! a respont Lenig.

— Goulenn ar pez a giri Lenig ! a lavaras an intron gand eur vouez flour.

Lenig a zellas en dro dezi. Gweled a reas eur vodenn zivi gouez, a gav ken mad hag a zo ken bihan, siwaz !

— Gwir ? e hellan goulenn forz petra ?

— Ya, Lenig.

— Mad, me garfe kaoud sivi braz, ruz ha dous kement ha ma plij ganin !

— A vezo greet ive, Lenig ! Kemer ar vodenn zivi a zo aze. Kas anezi ganit. Lak anezi en douar e jardin da vamm : warhoaz vintin e vezo goloet a zivi bras, ruz ha dous ! Kenavo, Lenig !

— Kenavo, Intron...

Ha Rouanez ar Huz-Heol a zistroas d'he bro.

Lenig a jomas eno, keid ha ma welas he madoberourez o kerzed a-uz d'ar mor o skedi gand bannou diweza an heol. Raktal pa oe kuzet en tu-all da reier Kelern, Lenig a reas ar pez a oa bet lavaret dezi. Heb konta ger da zén, Lenig a blantas ar vodenn zivi e korn ar jardin.

Antronoz, mintin mad, Lenig a halvas he zad hag he mamm : chom a rejont sebezet o weled kement a zivi braz ouz eur vodenn ken dister !

Lenig a gontas neuze ar pez a oa erruet ganti. He zad a zoursias mad ouz ar blantenn hag abaoe n'eo bet manket morse ar sivi braz, ruz ha dous e Plougastel.

Yann Gorrigan.

« EMGLEO BREIZ »

a embann Penn-Oberou al Lennegez Vrezoneg.

Dindan ar Wask :

" GEOTENN AR WERHEZ "

Da geñver XX^{ved} deiz-ha-bloaz maro JAKEZ RIOU, e lak « Emgleo Breiz » 2.000 skouerenn euz « GEOTENN AR WERHEZ » da zond er-mêz.

Eul leor 112 pajenn 350 lur
120 Skouerenn war baper kaer..... 500 lur

Goulenn diwar-vremañ « GEOTENN AR WERHEZ » digand

« EMGLEO BREIZ », B. P. 17, BREST

« GEOTENN AR WERHEZ » a zo moullet gand aotre hegarad an Itron Riou.

Du ha Duig Vigneul

Ar saout a ya a-wechou d'en em dourta. An dud a ya a-wechou d'en em laza. Ar brezel ! Soñj am-eus p'edon bihan : e korn an oaled diouz an noz, eur hleuzeurig o krena gand e houlou bihan war an daol, va mamm-goz a jome pell da veilha. « Ne deom ket d'or gwele c'hoaz, « Nen » ? — Tra, va mabig... — Med perag ne gontit din netra, Nen ? Kanit din 'ta son Sant Mikêl. — Nann ! va mabig, Hirio ne ganin ket. » Ha Nen goz a lakee he daouarn da guzed he daoulagad. Me a glaske o zenna kuit... « O ouela emaoñ, Nen ! Perag emaoñ o ouela ? » Ne gomprenen ket ! Va Nen he-doa eur mab e kreiz an tan ahont e Verdun, hag he halon a vamm a oa enkrezet. Va zro din-me a oa deuet, ha tro va mamm da ouela e korn an oaled d'ar pardaez !

Piou ne deuio ket e dro da vond d'ar brezel ? Mammou, pehini ahanoh ne deuio ket he zro da ouela e korn an oaled ?...

An dud a zo greet ganto ! Gwad peb rummad tud o tond war an douar a rank ruilh a flao. Perag ? Den ne oar mad perag !

Me a gav din eo ablamour ma kendall atao an dud da zevel Tour Babel. Dallet gand o ourgouilh e kav dezo int speredeg gouest, ken kreñv ma n'o-deus mui ezomm euz a lezennoù Doue !

Doue ! Doue ! savom heblañ traou kaer meurbed, traou kaerroh eged ar re e-neus savet.

E lezennoù ! Ni on-eus kavet gand or spered ijinuz re welloh eged e re.

Doue ! tud evelom-ni n'on-eus ket ezomm mui euz a Zoue. An Deskadurez e leh ar Feiz ! Gweled a reoh : ni a ray euz ar bed, oll unanet, eun tour dudiuz a zavo e gern e bolz an Neñv, beteg palez Doue, da ziskouez dezañ n'on-eus mui ezomm ebéd anezañ !

Med dizale e sav freuz etre al labourerien o klask gouzoud piou a zavo er garidou uhella. Freuz ken na ziaoulo ! Tud a gouezo a villerou, ha mammou a leñvo !

« Ma n'eo ket Doue eo a zav an tour, en aner e labouro ar re a zo ouz e zevel. » Ped mil bloaz 'zo e-neus Doue henn embannet. Med an dud a zo pennog hag atao ken diod ! Ne zoñjont e komzou Doue nemed pa gouez o meud en o dorn, ha p'o-deus gouelet a-walh ar mammou.

Vigneul ! eur geriadennig e-kichen an harzou, eur geriadennig koant heñvel ouz Lambaol. War laez d'an iliz eur maner. Med ni soudarded ne vezom ket lakeet er manerioù. Eun tamm lab a zo roet deom e-kichen eur hraou saout. Eno war ar holo e hellom en em astenn ha diskuiza. Anaoudegez a reom buan gand tud an ti, an aotrou m'êr, e wreg, eur vaouez santel, daou baotr yaouank ha Mari-Janig, ar verhig vilhan ken koant. Pegen mad int bet evidom ! Bemdez e veze degaset deom eur zailhad laez ! Ni a deuas da veza buan en ti evel er gêr, ha dioustu, pa hellem distaga euz a ober toullou, n'o-deus morse servichet da netra, ni en em lakee da gerhad boued, da gutuilh mirabel, da skoazella an dud vad-se en o labour. Ha d'ar pardaez, pa deue dre heñchou Vigneul ar bandennadou saout d'an tiegeziou, ni tud diwar ar m'êz a zeske d'ar Barizianed drailha boued d'ar chatal ha zoken o goro !

Pebez buhez kaer ! Ar barr-amzer fall n'oa ket dirollet c'hoaz, med kaoz fall a oa.

Eur pardaez, Du a halas. Ar Barizianed a gave dezo emichañs e veze kavet al leueou bihan er haol-pom, ken braz e tigorent o genou o weled eun Duig bihan o tond war an douar. O na pebez boutou koant e-noa, na pebez daoulagadig buhezeg ! Unan ahanom a zalhe al letern. Din me oa roet an hollen war eur plad ha dioustu. avad, dao da frota e gein da Zuig ! E vamm a vleujas beteg ma oe roet dezi he mabig da lipad.

En noz me a yeas d'ober eun dro d'ar hraou. Al leue bihan a deuas davedon hag e zaoulagad a skede evel daou breñv glaz e toull eur haë. Chom a ree da zelled ouzin. Ha me a zoñje.

« Paour kêz bihan ! ken tener ha ken brao. A-benn eun teir pe beder sizun amañ, e vi gwerzet d'ar higer. Da vamm a ouelo. Mari-Janig ivez a ouelo ! a-benn-err e vi strinket er harr, hag eun eur pe ziou goude, gand eun taol mor-zol didruez, e vo greet ar stal ahanout. Paour-kêz bihan ! Med ne ouezez dare petra zo ouz da hedat, e-leh ni, ni a oar... A-benn nebeud amañ, warhoaz, goude warhoaz, ni a vo kaset ivez d'ar gigerêz !...

Al leue bihan a lamm harp e va fri, en em lak da redeg war-dro e vamm, a lamm penn-dibenn, a zav en-dro hag a deu adarre d'am hichen. Me 'gav din e weled o c'hoarzin evel ma ran bremañ va-unan. Me 'gav din e gleved o lava-red din : « D'ober petra ober bilou ? Warhoaz ? Warhoaz ? Lez 'ta warhoaz ! Hirio eo kaer beva. Bevom hirio ! »

Saout an Aotrou Daniel a oa chentil kenañ. Ni a ree dezo allazigou aliez. Me, dreist-oll, a veve adarre en o hichen bloaveziou va bugaleaj, ha dioustu pa hellen e vezen ganto.

Med al leue bihan Duig ! N'eus bet morse war an douar eul leue hag a ve bet greet dezañ kement a gamambre. Mari-Janig, dioustu pa zave, a ranke dond da bokad dezañ, ha ni a ree evelti. Na ped gwech e-leh mond d'ober an toullou sot-se e chomem kuzet er hraou saout da gomz gand Duig, or bapa bihan.

Ar pardaez a deue. Ne oa ket mui a frouez er gwez. An amzer a oa goloet. Erru oa ar goañv, ha maouez ar m'êr a houlennas ouzom ha n'on-oa ket ezomm a balennoù evid an noz.

Goude ze ez eas da horo.

Evel gwechall e kraou Sandrione e-kichen va mamm, me a gare beza en he hichen akodet ouz eur vloh ha marvailhad. A-greiz-oll e oen sebezet. Er zailh e koueze lêz, med koueza 'ree ive daelou !

« Petra en em gav ganeoh o ouela ? — Petra en em gav ganin ? Ouz ho kweled oll o c'hoarzin evel ma rit, ouz ho kweled, c'hwî dreist-oll, beleg, ken bugel, e ranker gouela. Pemp bloaz warn-ugent 'zo e oa amañ eur strollad soudarded evelloh, eur beleg a oa ivez ganto. Hini ebéd n'eo deuet en-dro. Oll lazet !... »

Ha puilhio c'hoaz, an daelou a gouezas.

Va re din me ivez !

Lod ahanom a jomas. Re all a oe kraouiet bloaveziou hag a veze laouen, pa hellent kaoud evel ar zaout, eun tamm rutabaga da derri o naon spontuz.

Med ar vamm, ar paour kêz mamm, a ouele o horo ar saout, nag a zaelou he-deus bet da skuilh abaoe.

Evid kas pell euz ar vro an enebour, evid on tenna euz a boan, he gwaz, ar m'êr, e 1942, a gemeras penn ar huz. Ar mab kosa a reas evel dan. Er zal edom enni e veze lavaret bemdez an overenn.

Eun deiz e oent gwerzet gand itron ar maner a gave dezi oa deuet ar poent d'ar manerioù da gemer en-dro o galloud war ar bobl. An hini a oa e penn ar bobl-ze, ar m'êr, a oe kaset da vervel er verzerinti e bro gaer an Alamagn.

Ar mab hena a oe lazet. Egile dioustu a yeas d'an emgann, pell, war ar hirri-nij ha kelou ebéd mui e-pad bloaveziou ahann m'en em gavas er gêr, goloet a haloñchou, a vetalennou, da lakaad an dorn war vaner an hini he-doa gwerzet e dad hag e vreur.

Eñ a zalhas tiegezh e dud koz hag ar maner a roas da Vari-Janig, e hoar muia karet.

Distroet on, n'eus ket gwall bell, da Vigneul. Na pebez degemer ! Ar vamm zantel a lavare din :

« Va daoulagad o-deus gouelet a-walh ; ra deuio an Aotrou Doue d'o zerra buan ! Pardonet em-eus pell 'zo. Ra vo pardonet din ivez ! Er Baradoz, ni a gavo adarre al laouenidigez, unan vrasoh c'hoaz eged an hini a oa en ti-mañ p'edoh aze o kousked el lab. »

Ha Mari-Janig, ar verhig vihan a wechall, bremañ dimezet, ha rouanez ar maner, nag e oa laouen ouz va gweled.

« Er gêr emañ, gouzoud a rit. Deuit en-dro gand ho soudarded. Amañ 'z eus plas dezo ! »

— Ya, med ar zaout, Mari-Janig ?

— Ar zaout ! It d'o herhad ! Evidon me n'em-eus ket ezomm euz eur maner ma n'eus ket ennañ a zaout ! Alo, it d'o herhad ! Er prad en traoñ d'al liorz emaint. »

Ouspenn ugent bioh he-deus bremañ Mari-Jann, saout euz ar haerra, re ruz, re velen, re wenn ha re zu ive, lieñvel poeh ouz an Du on-oa karet.

P'edon, e va soutanenn, o fonn gand ar saout hed ar vali, Mari-Jann, er prenest, kurunet a blasvez hag a vleuniou, a vouse'hoarze evel gwechall, e-tal dor he zi, p'am gwele !

Med, en eun taol kont, evel va mamm-goz, war hichen e toull an oaled, Mari-Jann a guzas he daoulagad gand he daotarn.

Mari-Jann a wele Mari-Janig. Ha me ivez he gwele, gand re all en hé hichen.

Mab an Dig.



FURNEZ AR RE GOZ

Neb a zo laouen gand bara zeh
A gav da beuri e peb leh.

Ar gwella bara da zebri
A vez gounezet o houezi.

Neb a labour stard hag e galon
Ne varvo morse gand an naon.

Tud yaouank a-barz dimezi.
Grit eur hloz en-dro d'ho ti
Ennan, teir vodenn c'houi hado
Bod klemm a-zehou, bod neh a-gleiz
Ha bod rann galon e kreiz.
Lakit ivez ennañ greun pasianted
Hag it aliez d'o gweled
D'o doura, dour ne vanko
Rag euz ho taoulagad e kouezo.


Mond pell gand nebeud a "esans"

Mad eo gouzoud penaoz lakaad da dalvezoud ar banne esañs a vez roet, beb miz, da beb hini ahanom.

Da gentañ, arabad mond re vuan. Goustadig, paotred ! Dousig, merhed ar « volañ » ! Studiadennoù piz a zo bet grêt gand an ijinourien, ha poent eo ober ar vad anezo. Ar peb gwella, emezo, eo mond gand 60% euz buander brasa hoc'h oto. O vond goustadikoh, ne vez deved nemed 5% nebeutoh a esañs, traoù dister e-keñver an amzer gollet. O vond buannoh gand an hent, avad, ez a kalz fonnusoh an esañs e-barz ar moteur, ive. War eun hent plén a-walh, o vond gand 60% euz buander uhella ho karr-tan, e hallit espern etre 30 ha 50% euz hoc'h esañs. An otoioù gouest da vond buan-tre eo a espern ar muia

Evid al lodenn vrasa euz otoioù on amzer, kement-se a zinifi mond da 70 km. an eur. Ha buan ez eer, a-benn ar fin, pa 'z eer atao ingal. Ha just a-walh, evid devi nebeud a esañs, n'eo ket a-walh chom heb mond re vuan. Divennet eo, ive, mond a-daoladon. Na stardit ar mekanik nemed diouz red, eta, dre zevel ho troad diwar an aselerateur abred a-walh, evid lezel hoh oto da goll lañs, araog erruoud el leh ma vo dlêet mond dousig. Ha na adkrogit ket krenn da vond fonnuz ! Pouezit a-nebeudou war ar buanaer. Grit gand an trede (pe ar pevare) buander an alies a gwella. C'hwitezit mad ho pevar neu. Lakit eoul tano e-barz ar harter, ha lardit mad ar rojou hag all. Ha goulennit o alioù digand an dud a vicher, na petra 'ta !

D^r J. Tricoire.



Krommenni euz an dispign esañs hervez ar buander, bet savet diwar an deg seurt otoioù implijeta er Frañs, hizio an deiz. deiz.

En tu all da 60% euz buander brasa an oto, e kresk buan-buan dispign an esañs. O vond gand 60% euz ar buander brasa, peotramant goustadikoh, ne vez dipignet nemed 60% euz an esañs ive, pa vezer o vond gand eun hent plén-kenañ. War al lodenn vrasa euz on henchou, ne vo espernet nemed 30-50% euz an esañs, peza gont dija !



Eun dén a bign en eun taksi. Pa lavar d'ar blenier chom a-zav, hemañ a zistag dezañ : « 420 lur eo ! » — « Va digarezit, Aotrou, méd n'ez eus nemed 400 lur ganin. Kilit 'ta evid 20 lur, mar plich ! »

(Klevet.)

« — Penaoz e rez-te evid gelled mond en hent kén aliez gand da garr-tan, daoust d'an diouer a esañs ? »

« — N'eo két diêz. Me a zeu d'ar gêr dre an hent am-eus kemeret da vond hag evelse e tastuman en-dro an esañs devet ! »

(Klevet.)

TENZOR AR BREZONEG-BEO

« Dastumom ar bruzun ! »

Setu ar halvadenn e-neus roet da gleved meur a wech an Ao. Perrot, Doue e bardono ! Dastumom ar gériou nebeud anavezet, ar gériou n'int ket bet embannet er geriaduriou. N'ouzon ket ha kalz a zo bet o senti outañ ; gouzoud a ran avad, ne 'z eus bet embannet nemed nebeud a dra. Marteze, koulskoude ez int stank ar re o-deus greet evel don, merka ar pez a gavent. Da betra, evid-se, e talvezo o labour ma ne vez ket embannet ?

Sonjet am eus renevezi galvadenn an Ao. Perrot.

Pevar geriadur brezoneg-galleg a zo war va bureo : Ar *Gonideg* (1850), *Ernault* (1927), *R. Hemon* (1943), *Stephan-Seité* (1956). Hini *Troude* a garfen beza bet, n'am eus nemed al lodenn galleg-brezoneg. Ar gériou a zo meneget e hini pe hini euz ar geriaduriou-ze, n'eus ezomm ebed d'o adembann. Awechou, koulskoude, e talvezo ar boan henn ober : pa vezo d'ar gériou-ze, steriou ha n'int ket meneget, pa vezo troiou-lavar diembann pe grenn-lavariou savet diwarno, pa vezo tra pe dra all da lavared diwar o 'fenn, o orin ha kement 'zo.

Al labour-mañ a vo greet *lizerenn dre lizerenn*. Evel-se e vo ez d'ar glaskerien a zeuio diwezatoh. Ar gériou nebeud anavezet, embannet amañ ahont, ar rollou disparti, a hellfe kaout o 'flas amañ ive, lizerenn dre lizerenn.

Al labour-mañ ne vo ket labour eun den nemed-ken ; anez n'e-nefe ket kalz a dalvoudègez. Bez ' e vo, ma plij gand on lennerien, *labour oll vignoned ar brezoneg*.

Hirio e roin eur roll gériou a gomañs gand a. Sikouret on bet dija gand an Ao. Falc'hun evel ma weloh. D'al lennerien neuze furchal en o 'faperiou koz pe en o spered, pe hoaz klask endro dezo e serr konta kaoz gand ar re goz. N'eo ket awalh !... *digas din frouez o enklask*. Embannet e vo anioi ar gaverien. Dirag peb ger, lakaad an droidigez halleg, lakaad eur frazenn eleh m'eo implijet ar ger, awechou zoken diou pe deir frazenn evid rei gweloh da intent ; e peseurt parrez e vez implijet.

Ma kar peb-hini dond war va zikour (Leon, Kerne, Treger, Goelo, Gwened) e vo kavet amañ eur vengleuz dispar a vrezoneg beo evid ar ouizieien da zond.

V. FAVE.

1. Abati.

a) [F. F. (1). E galleg koz, *abati*, *abatis* pe *abattis* a oa « action d'abattre, chose abattue », ensemble de choses abattus, renversées. — « Grand occision et abattis d'hommes. » — « L'abatti était déjà grandt entour leurs bannières. » (Geriadur Godefroy.)

Er ster-ze, ar brezoneg *abati* a zo eur meskaj traou ledet en dizurz, ha n'e-neus netra da ober gand « ti an abad. »]

« *E kreiz an abati* » — a vez lavaret e Gorre hag e Goueled Leon, e Skaer... pa vez eun dra bennag stlapet pe lezet en eul leh ha n'eo ket e blas, sin a nebeud a urz.

« Ar vatez a zo trohet kuit euz ar gegin, lezet ganti he sailh *e kreiz an abati*. »

« Echu oa an dervez dorna, chomet oa an benviou war al leur, *e kreiz an abati*. »

N'am eus klevet implij ar ger *abati* nemed el lavarenn-ze.

b) Eun dro lavar all a zo tost kar da honnez : « *war an disparu* ».

[F. F. E galleg koz, « diparer » a oa *dispartia*, *distaga*. Ar ger brezoneg a dle dont euz eul leh a Vro-Hall ma veze lavaret « disparu » e leh « dispartè », *disparti*, *distag* (Godefroy).]

Euz eun dra *war an disparu* e heller lavared emañ ive e-unan, disparti, e leh ma ne dleje ket beza.]

(1) F. Falc'hun, kelenner e skol-veur Roazon.

« Ar vugale a zo bet aze hag o-deus lezet o c'hoariellou *war an disparu*. » Kaoud a ra din ive ez eus en dro-lavar « war an disparu » ar zonj emañ an dra a-wel d'an oll, heb goloenn na gwasked.

« Savet o deus o zi nevez e kreiz ar park, *war an disparu* ; « Lonk avel » eo an ano a vefe dleet rei d'o zi. »

« Ne jomom ket amañ *war an disparu*, deom tre en ti. »

2. Abeg.

a) « *Kaoud abeg ennañ* » kaoud ennañ tra pe dra hag a zisplij deor, hag a damaller.

« *Ne gav nemed abeg e kement a ra e vreur*. »

b) « *Klask abeg ennañ*. » Klask peadra da damall, da rebech en e gompotantant.

« A heb a glask abeg a gav atao. »

c) « *Klask abeg outañ* », pe *klask afer outañ*, *klask sinkan outañ* ; klask tro da gaoud rendañ gantañ.

« *Dalh-mad ema o klask abeg ouz unan bennag*. »

[F. F. orin. Da gredi eo ez eus amañ eur ger euz famill ar verb pega. Klask abeg ouz unan bennag a zo klask tapa peg ennañ, kaoud krog ennañ pe warnañ. — Hervez Victor Henry (lexique étymologique du breton moderne) a ger a hell dond euz teir lizerenn genta an alfabet, « Abek, cause, mot fermé des trois premières lettres de l'alphabet, comme nous dirions « chercher l'a b c d'une chose, l'épeler », pour « la décomposer en ses premiers éléments »].

3. A-benn-err buan-buan.

a) « *A-benn-err eo deuet warnon*. »

b) « *Tenna benn-err* » (Gorre-Leon) kemered lañs araog lammed.

« Deom da c'hoari lammed dreist ar houder ; nemed *ne vo ket a zroad da denna benn-err*. »

Skriva a ran *err* ha n'eo ket *herr* ablamour d'an orin.

[F. F. orin. Euz ar galleg « errer », tiz, a deu e-unan euz al latin « iter » hent. Euz al latin izel « iterare » e teue ar galleg « errer », ober hent, e gaver e « Juif errant », Juzeo baleer pe foueter hent. Hirio « erre » n'eo mui implijet e galleg nemed evid komz euz tiz eur vag pe eul lestr goude ma vez trohet ar moter a greiz bale. »] (Hervez O Bloch ha W. von Warburg, Dict. étym. de la langue fr.).

4. Adarre.

« *Adarre 'zo rebech* », respont fentuz pa vez lavaret « adarre » da unan bennag.

« Ahanta : o vond d'ar marhad emañ adarre ? — *Adarre 'zo rebech*. »

Awechou a vez lavaret « *endro* » e leh adarre. E Skaer e vez lavaret « *endro 'darr(e)*. »

5. Aer (Er) c'hwez fall, c'hwez kreñv (Skaer).

E kambr eur hlanvour :

« Devet am eus paper c'hwez vad, *er 'zo gantañ*. »

(Da genderhel.)

✱

Setu aze eur roll kenta. Deoh bremañ da labourad.

Er miz a zeu e vo lakeet da genta kement an befe resevet hag a zell ouz al lizerenn A ; hag e kendalhim gand B. Eul labour talvouduz ha plijaduruz a ginnigan aze d'an oll.

Kas ar responehou da :

V. FAVÉ, 31, rue Elie-Fréron, QUIMPER (Finistère).

Amzer da zont ar besketèrèz

Arabad eo kredi e vefe echu gand ar besketèrèz. Ar bevañz a ra diouer dre ar bed. Lod tud a zo ha n'o deus nehamant ebet o klask gouzoud petra zebrint euz an eil dervez d'egile med eul lodenn vad a zo ivez, ouspenn an hanter ha n'o devez ket da zibri diouz o naon.

Ganeom-ni e konter 72 den dre gilometr karre, broiou 'zo en Azi, hag a zo enno ouspenn mil; hag eno n'eus tro ebet da greski an douarou labouret, pell 'zo e vez lakèt riz e peb korn. Lennit 'ta al levr « Le Riz et la mousson ».

E Breiz n'emañ ket kaer an traou kennebeud. Ar hazetennou a lavar deom n'o devoa mui a avalou douar pesketaerien enez Re er goañv tremenet. Ha pa ra diouer an avalou-douar ganeom-ni, pesketaerien, e heller lavared ez a fall ar bed. Treud eo bet ar gounidou gand pesketaerien Breiz hag ar Vendée er bloavez tremenet, ha treud ar zoubenn.

Evid digas gwellaenn e buhez an dud, e poanier, e peb bro, da gas ar henwerz war-rôg. Ar varhadourez a zeu hag a ya kalz buannoh ha dre lraz Doue n'eo ket ken stank mui ar barradou kernez a wechall a varve miliadou tud diwar o houst. Bro-China hag an Indez a laka digas riz euz broiou ar Filipin pe ar Siam. E penn kenta ar hantved e teue deom c'hoaz ar gwiniz euz broiou diavéz. Koulskoude c'hoari mond-dond ar varhadourez hag ar bevañz ne da ket c'hoaz mad a-walh en-dro hag e-keid ha ma vez-naon en eun tu e chom berniou bevañz da vreina e leh all.

En desped d'an douarou gounezet beb bloaz war ar gouelehiou pe ar gwer-niou ha palujou... buannoh e kresk an dud eged ar bevañz. A-benn daou hant vloaz amañ e pe-leh e vo kavet boued da rei da zebri d'an tri miliar a dud a vo war an douar!

Ar mor a hellfe rei kalz muioh.

Er Frañs ne gemer frouez ar mor nemed eul lodenn dre gant euz bevañz an dud: e Bro-Japon 40 dre gant! Warzu ar moriou eo e tleom trei on daou-lagad. Diou wech muioh a vor eged a zouar a zo dre ar bed. Er mor ez eus eur bern loened ha loenedigou, geotennou ha drevajou a beb seurt hag a hell beza debret gand an dud. Petra a vez pesket? Netra nemed eul lodenn vihan, ar pesked a anavezom mad; marteze zoken e vez sachet re war ar re-mañ. Ar balumed (baleines) ivez a vez paket, nebeud avad evid ar bevañz.

Kavet ez eus bet lod bizineier hag a zo mad kenañ da zibri, boued fetiz ha yahuz anezo. Tro a zo d'o hada ha d'o eosti evel gwiniz pe velchon nemed avad e vez puilhoh ha ponnerroli an eost. Emaer o studia peseurt talvoud-deg e-neus ar « plancton » evid magadurez an dud, doare loenedigou o neuñv war ar mor. Ni a gav gwelloh sklêr eo, eun tamm bifttek med da houd eo petra vezo friko evid er rummadou da zond.

N'hellim ket chom beteg fin ar bed da besketa sardined ha sili ha koulskoude, ni pesketaerien eo a zo galvet da vaga an dud. Petra deum da veza? kouerien o sevel bizin evel ma vez savet gwiniz? pe splujerien o vond e goueled ar moriou da laerez o finvidigeziou pe chalboterien dre oll voriou ar bed! N'oar den. Deom-ni da weled euz pe du teuo an avel.

(Diwar « Grand Lague » Meurs 1956.

Anton Puilh.)

LIZIRI

Setu eul lizer bet kaset deom gand eur paotr yaouank hag e-neus studiet ar brezoneg o heulia penn da benn or skol dre lizer. E korv daou vloaz, hag en heb gouzoud tra euz ar brezoneg, eo deut a-benn da skriva eul lizer hag a rafe enor da veur a vrezoneger, hag a ziskouez ne jom ket difrouez on labour.

Aotrou kaer,

Kas a ran deoh eul lizer evid rei keleier: mad on a-walh em buhez nevez. Spi am eus eo evelse-se an traou ganeoh.

Setu eur miz m'emañ o chom aman, e-kichen kêr Nancy, oh ober va honje. Em hambr ez eus war-dro pempzeg Breton. An hanter anezo a zo brezonegerien. Goulenn a ran diganto penaoz e tistagont ar geriou brezoneg hag e welan em-eus strivou d'ober. Nebeud ha nebeud e seblant din ez an war-raog. Ma kendalhan e-giz-se e-pad triweh miz pe zaou vloaz e vezin barreg da zisplegan peb tra gand skoazell yez ar vro. N'on ket erruet aze, avad.

Kaset em-eus ganin al leur ho-poa roet din goude va studiou brezoneg. Echuet em-eus d'e lenn en deiziou tremenet. Souezuz eo pegement eo bet fetiset va geriadurig brezoneg. Kenderhel a rin da lenn brzoneg ar muia ma hellin evel m'ho-poa aliet ha peogwir eo ken plijuz an etedou. Kasit din eta al leur: « Konchennou Bro ar Ster Aon ».

Komz a ran hoaz euz ar henyroiz a zo ganin. N'hellan ket beza lorthuz tre ganto: i a zo kentoh aonig. Da skouer: ar muia anezo a ga d'an overenn beb sul pa vezont en o zi. Erruet aman ne gredont ket ober evel-se. Ar sin eo n'eo ket krenv tre o feiz, diazezet war voazamanchou hebken — evel ar gwiskamanchou a jenger p'her goulenn ar hiz.

Pa venn ar Vretoned, evelato, barreg int d'ober traou kaer: komdant ar hazarn hag ar park e-leh ma touar ar hirri-nij a zo eur Breton.

Bez' ez eus eta daou seurt a Vretoned: ar re a ya war-raog hag ar re a heuilh, war-lerh. Rouez eo ar re genta ha stank re an eil rumm.

Goueliou kaer or bro a zihun lod euz an eil rumm. Pa 'z int bet dihunet, dao eo o hentelia evid ma teuint da veza evel ar re genta: blenierien ar bobl.

Al labour-ze a zo greet gand « Bleun-Brug » hag ar helaouennou katolik ha breizeg all, med ar re-man ne zifennont ket kement ar brezoneg, ene Breiz.

Gelloud a ran goanagi: paotred ha merhed kaloneg a zo er vro ha niveruz a-walh int, ne gav ket deoh? Ne glaskom ket an niver, med dreist-oll ar peb gwella.

Gwelet diouz pell, pegen kaerroh e seblant hoaz or Breiz! Reber Bro-Frans a zo dishenvel tre diouz or bro deom-ni. Tro ar kêriou braz a zo divalo gand ar savadurioù a beb seurt, direiz o blaz. Kalz labouradegou a zo e Bro-Loren; dreist-oll en dro d'ar gêr-benn, Nancy. Bez' z eus ivez gwelvaou brao: krehioù ha menezioù, koadou glaz beler warno, kêriou bihan en traoniennou, klohdioù dister en o breiz. Klohdioù ar mêzioù a zo disterig a-walh ar peurliessa, med e Nancy ez eus eun iliz-veur kaer.

Gweladennet em-eus ivez, er gêr-man, ar « plas Stanislas », duk diweza Loren ha roue Bro-Bologn an den brudet-man a zo e-kreiz ar blasenn.

Echui a ran va lizer en eur ho pedi da reseo va gwella gourhemennou e Doue ha Breiz.

Marcel Couëdel.

...Après avoir travaillé à fond « Le Breton par l'Image » que j'ai trouvé intéressant, je voudrais maintenant recevoir « Yez hon Tadou » ainsi que le lexique Breton-Français et Français-Breton.
Soldat P. T., Constantine.

Je me permets de vous demander s'il vous serait possible de nous expédier gratuitement 5 cours par correspondance de Breton. En effet cette année la Jeunesse Etudiante Bretonne a décidé d'insister particulièrement sur l'enseignement du breton à ses membres...

J.E.B., Lille.

Sur les conseils de M. le professeur Falc'hun, je viens aujourd'hui vous demander quels ouvrages scolaires pour l'enseignement du breton vous pourriez me procurer. Il ne s'agit pas pour moi d'enseigner le breton, mais bien de l'apprendre.

J. A., Assistant à la Faculté des Lettres de Toulouse.

Je m'intéresse beaucoup à la langue bretonne, et j'ai envie de l'apprendre. Dans le numéro de Décembre d'« Ar Soner » j'ai lu votre petit article à propos d'« Ar Skol dre Lizer ».

Joris Souffrian, Erembodegenn - Terjoden, België.

Il me paraît que le Bleun-Brug organise des cours de breton par correspondance, et cela à titre gratuit... Devant une telle aubaine je n'avais qu'une chose à faire, me documenter davantage...

Je possède depuis deux ans déjà votre tome I de « Yez hon Tadou » qui est très bien... Je suis originaire de Loctudy... Maintenant j'ai des raisons sérieuses de croire au breton... Nombreux sont ceux qui parlent breton maintenant, alors qu'ils ne le faisaient jamais dans leur jeune âge... Le breton a la vie dure et on reste songeur devant les noires prédictions de certains esprits pessimistes.

N. L.

Je vous serais reconnaissant si vous pouviez m'expédier les ouvrages suivants : « Le Breton par l'image », « Yez hon Tadou », « Me a zesk brezoneg », lexique breton-français et français-breton, « Buhez hor Salver JezuzlKrist ». J'effectue ce jour à votre C.C.P. un virement de 1.700 francs.

G. B., Ergué-Armel.

Depuis longtemps je désirais savoir lire et écrire la langue bretonne. C'est donc avec joie que je recevrais « Le Breton par l'Image ».

Frère C. G., Hérouville.

Breton en traitement... ici à Briançon j'aurais voulu des lectures de ma langue d'origine pour me distraire. On m'a conseillé votre revue « Bleun-Brug ».

N. D., Briançon.

Il y a longtemps que je désire étudier la langue bretonne ; j'ai l'intention de me mettre au travail sans tarder.


V. M., Brest.



GERIOU - KROAZ

A-BIén. — 1. Ar re-ze a zo deuet da heul Eva. — 2. O verka e pel leh ema an traou. Ennañ emaom o chom. — 3. Menezioù uhella Breiz-Izel. — 4. An den-ze pe an dra-ze. — 5. Rei kuzulioù. — 6. Grêt gand krohen al loened.

A-Zerz. — 1. Eno e vez gwerzet ha prenet kalz traou. — 2. N'eo ket diéz. Hennez e-neus eur spered, med korv ebed. — 3. Muioh eged na fell din kaoud. Ragano gour liez (pronom pers. plur.). — 4. Er o tond er-méz euz ho korv, noz ha deiz. — 5. Pa vez traou a beb tu. — 6. N'eo ket éz.



KELEIER

KANV

Pa oa on niverenn diweza dindan ar wask, eo digouezet ganeom kelou maro an AOTROU ERWAN AR MOAL (Dir-na-Dor), bet rener ar Bleun-Brug. Gouestlet e-noa e vuhez d'ar Feiz ha d'ar Brezoneg, ha savet e-noa evid o divenn ar helaouennou « Arvorig » ha « Breiz ». Eur skrivagner flour ha buhezeg e oa ivez, anavezet mad dre e beziou-c'hoari niveruz, ha dreist-oil dre ar hontadennoù marzuz dastumet el leor « Pipi Gonton ». On lennerien a gavo e niverenn 85 Bleun-Brug (miz Du 1955) eun nebeud pajennoù gouestlet dezañ hag unan euz e varzonegou diweza. En niverenn a zeu e komzim hirroh diwar e benn hag eh embannim ar brezegenn gaer a reas an Ao. Vikel Vraz Brochen da geñver e interramant.

Buhez ar Bleun-Brug.

Abaoe m'eo moulet an niverenn ziweza, e-neus or sekretour gweladennet ar skoliou-mañ : Plabennec (paotr. ha merhed) ; Kerber (p.) ; Plougastel-Daoulas (m.) ; Loperhet (p. ha m.) ; Poullan (m.) ; Mahalon (p. ha m.) ; Landudec (p. ha m.) ; Pluguffan (p. ha m.) ; Pont-e-Kroaz (p. ha m.) ; Gwaden (p. ha m.) ; Primelin (m.) ; Eskibien (m.) ; Kastellin (skolach, tredé abadenn, ha skol ar merhed) ; Landrevarzec (p. ha m.) ; Gwengat (m.) ; Ar Yeuc'h (m.) ; Sizun (p. ha m.) ; Bodiliz (m.). — Peurlvuia e vez gwelet diou skol bemdez : eun hanter devez e peb hini. E pel skol e vez gwerzet levrioù. E-touez ar vugale vraz, ar geriadurig nevez brezoneg-gallez ha galleg-brezoneg, a zo éz kenañ da werza : Buan e vo diviet ma kendalh da vond er-méz evel ma 'z a bremañ. Advouladur « Yez on Tadou » a zo gortozet gand mall braz. Red e vo poueza war mouller evid ma vo greet buan al labour boulhet dija eur pennadig a zo.

Goude beza gwelet eul lodenn vad euz skoliou Kerne, ema or sekretour o vond bremañ da weladenni skoliou goueled Leon.

Bleun-Brug Leon.

Bleun-Brug Leon a vo e Lanniliz d'ar 14 a viz Gouere. Lennet on-eus gand plijadur war ar journalioù, e-neus an Ao. Mèr hag e guzulierien, votet 100.000 lur evid digemer ar Bleun-Brug. Meuleudi dezo ha bennoz Doue.

Skol dre lizer.

Dond a ra atao skolidi nevez, meur a hini soudarded en « Afrique du Nord ». Ar skolidi a vez ingalet etre ar gelennerien. c'hwec'h anezo bremañ, rag, an Ao. Chaloni Fave, Vikel-Vraz a ra deom an enor d'or zikour.

Or bodadegoù.

Eur vodadenn pouezuz kenañ, dindan renerez an Aotrouez Falc'hun ha Moal, a zo bet e Kemper, e fi an Ao. Chaloni Fave, d'ar 17 a viz C'hwevrer, evid mignoned ar Bleun-Brug diwar-dro Kemper. An oll re a oa pedet, 19 anezo, a en em gavas eno evid an devez penn-da-beun. An D^r Trolcoire, euz Kastellbriant, a deuas ive da labourad ganeom.

Kudennoù, e sell ouz ar brezoneg en amzer hirio, a zo bet studiet a-gavret. Divizet eo bet kemer kanton Kastellin da dest ha studia ennañ kement tra a zell ouz buhez ar brezoneg.

D'ar 24 a viz Meurz, bodadeg c'hoaz en Naoned, evid or mignoned a Vreiz-Uhel, dindan renadur an Aotrounez Falc'hun ha Moal.

Kan ha Diskan.

Goude Poullaouen, Pouldreuzic ha Kleden-ar-C'hap, ez eus bet, d'an 3 a viz Meurz, eun devez « Kan ha Diskan » e Plevin (C.-d.-N.). Diouz ar mintin, kenstrivadegoù kan ha displega. Goude kreisteiz, abadenñ vraz gand gwella kanerien ha konterien ar mene-riou. Ken niveruz e oa ar zelaouerien, ma 'z eus bet ranket evel e Pouldreuzic hag e Poullaouen, ober an abadenñ e diou zal. Labour Lociz Roparz a ra berz. Meuleudi d'or mignon Albert Trevidic, d'aveza kaset kenkoulz da vad, devez « Kan ha Diskan » Plevin.

Levriou brezoneg a zo bet gwerzet en Naoned.

Bez 'ez eus en Naoned eur stal vraz, *Decré* e ano, hag a zo anavezet mad gand kement hini a zo bet en Naoned. Beñ bloaz, e miz C'hwevrer e vez aozet eno eun diskouezadeg diwar-benn korn pe gorn a Vreiz. Er bloaz-mañ eo bet tro Bro-Leon. Da geñver an diskouezadeg-se, e-neus « *Emgleo Breiz* », gand sikour ar « *Helh Breton* » lakaet e gwerz eun nebeud levriou brezoneg. Ha souezuz pegen dedennet eo bet an dud gand al levriou-ze. Da skouer, gwerzet ez eus bet : 54 *Lexiques* (Stephan-Seite) — 27 « *Komzom, lennom, skrivom brezoneg* » (Tricoire) — 20 « *Orthographe Universitaire* » (Falc'hun) — 19 « *Kanom uhel* » (Kendalh) — 12 « *Mojennoù ar Mor* » (Helias), ha kement... zo...

C'hoariva brezoneg.

N'eus ket c'hoar keit-se, a yeze c'hoariet kalz peziou brezoneg, en or parrezioù, da geñver meurlarjez. Hirio an deiz eo eur rann-galon sellad ouz roll c'hoarivaou ar patronachou, war ar journalioù, da geñver an deizioù-mañ : peziou galleg hepken. A-veh eur ganaouenn brezoneg, amañ hag ahont. Koulskoude, eur barrez, *Sant-Turio*, e-kichen Pontivy, a jom c'hoaz feal d'ar hiz vad.

Strollad *Sant-Turio*, d'an 10 a viz Meurz, dirag an *Ao. 'n Eskob Bellec*, e-neus c'hoariet « *Nikolazig* » peñ c'hoari kaer an Aotrou Bayon, a zo ennañ istor Santez Anna Wened. Nag on-neus bet plijadur o weled displega ar peñ-se ! Dond a rae gand ar hoarierien eur brezoneg komprenuz zoken da dud a Vro-Leon.

Meuleudi braz a zo dleet, da genta d'an *Ao. beleg Loric* e-neus kaset da benn, daoust d'e labour, eun abadenñ ken brao. Meuleudi ivez d'ar hoarierien, n'o-deus damantel na d'o foan na d'o skuizder. Ra gavint kalz re all da vale war o roudou.

Rad eo menegi, ousspenn, e-neus ar strollad, roet an heveleb abadenñ e meur a barrez all euz Bro-Wened.

Diskouezadegoù e Kemper.

Anavezet mad eo e Kemper ha tro-war-dro an diskouezadegoù kaer a vez greet beñ bloaz, e miz C'hwevrer, e stalioù an Itron Kemere, 2 strêd ar Roue Gralon ha 18 Bali Kergelen.

Ar bloaz-mañ, en unan euz ar stalioù-ze eo bet lakeet, a-wel d'an oll, al levriou euz ar Bibl bet troet e brezoneg gand Maodez Glanndour. Bennoz d'an Itron Kemere, ne dremen ket eur bloaz heb ma vefe roet d'ar brezoneg eur plas enoruz e Kemper, dirag daoulagad an dremenidi.

An dro-mañ, avad, eun diskouezadeg ken pouezuz all, ha kinklet brao eston, a zo bet greet e prenest braz bali Kerguelen. Gand sikour an *Ao. Doktor Le Thomas* hag ar gevredigez « *Breiz Santel* » ez eus bet dastumet skeudennou kaer euz or chapelioù, euz o hizelladurioù, hag euz o dismantrou, siwaz, e-kichen ar statuoù kavet er chapelioù distrujet pe gouezet en o 'foull. Bemdez eo bet displeget e brezoneg, war an daolenn du, buhez unan euz or zent koz. Kemperiz o-deus gwelet evel-se eul lodennig euz kaerderioù kuzet or bro. Salv m'o defe komprenet eo mall divenn or chapelioù ha skoazella ar gevredigez « *Breiz-Santel* » hag a labour kaloneg evid o derhel e-ratre.

Koumanantit d'ar gelaouenn « *Breiz Santel* ». Skrivet da : *M. de Beaufond* : *Mouvement pour la Protection des Monuments Religieux Bretons, Vannes. C.C.P. Nantes* 1536-85. Priz ar houmanant : 100 lur ar bloaz, 300 lur gand ar skeudennou.

madoberourien hag izili 1957.

AOTROUNEZ : L. Seite, *Kastellin*, 500 lur. — Guillerrou, *Dirtnon*, 500 lur. — Audic, *Plouay*, 500 lur. — Leseine, *Pariz*, 500 lur. — Audic, *Ploare*, 1.000 lur. — Fontaine, *Nour-les-Mines*, 1.000 lur. — Grassot, *Treboul*, 500 lur. — Omnès, *Dinan*, 500 lur. — Laurent, *Pariz*, 500 lur. — Yann ar Minor, *Pont'n-Abad*, 1.000 lur. — Jakez ar Minor, 1.000 lur. — Cozien, *Guilers*, 500 lur. — D^r Breton, *Boulvriag*, 1.000 lur. — Ar Ster, *Kemper*, 1.000 lur. — Bleunven, *Lokournan*, 500 lur. — Fichoux, *Plabenneg*, 1.000 lur. — Ar Minor, an *Naoned*, 500 lur. — Menou, *Gwaden*, 500 lur. — ITRON ar Minor, *Pont'n-Abad*, 1.000 lur. — ITRON Liberal, *Brest*, 500 lur. — DIMEZELLE : Chevallotte, *Brélès*, 500 lur. — Martin, *Brest*, 500 lur.

Bennoz Doue d'or madoberourien.

(Da genderhel.)

SKOL (niverenn 5, miz C'hwevrer 1957). Abbé A. Le Calvez, Skol Sant Erwan, Plouézec (C.-du-N.). C.C.P. 863.85 Rennes.

An niverenn-mañ a zo anezi eun dastumadenn rimadelloù hag unangomzou (monologues) savet dreist-oll evid ar vugale. Ar re vraz ivez a lenno gand plijadur traoù a beb seurt o-deus bet ar chafis marteze da zeski war barlenn o mamm, pe en eur hoari gand o hamaladed. Hag ar re n'int ket bet savet e kreiz ar brezoneg a gavo en dastumadenn-mañ boued fetiz da vuhezekaad o yez hag an doare gwella d'ober anaoudegez dounnoh gand spered ar vro. Eul leor talvoudur kenañ eta evid ar gerent hag ar vistri-skol, med eul leor n'hell ket beza skignet, siwaz, e-touez bugale ar skolioù, abalamour d'an doare-skriva.

Kendalh.

Meur a wech bep miz e weler war ar journalioù, bodadegoù savet amañ hag ahont, gand Kendalh, evid yaouankizoù ar helhioù. Bez 'z eus bet bodadegoù e *Konherne*, *Kemperle*, *Rosporden*, *Kemp*, *Lesneven*, *Pont 'n-Abad*... *Guemene-Penfao* ha *Pariz*.

A Falz.

Evel ma ra ar *Bleun-Brug* evid ar skolioù kristen e-neus « Ar Falz » nevez emban-
net, eur genskrivadeg vraz e brezoneg, evid bugale skolioù ar gouarnamant. Evid 250.000 lur a brizioù a zo da hounit. N'ankounac'hait ket eo digor ive henstrivadegoù ar *Bleun-Brug* evid 1957. Goulennit diganeom roll ar henstrivadegoù-se hag e vint kaset deoh evid netra. Klaskit ha pourchasit evidom kenstriverien.

LEVRIOU NEVEZ

A. RIVOALLAN. — *Présence des Celtes*. — Nouvelle Librairie Celtique, Paris. — 445 p. — 1.500 fr.


Setu eul leor a bouez, plijuz ha maguz, skrivet en eur yez flour. An oberour, anad eo, a anavez mad ar broioù ma komz anezo, o lennegez, o istor. Ne zebant ket beza klasket ober eul leor evid an dud desket, evid ar « *spécialistes* » da vihanha ; n'eus ket eun notenn e traoñ eur bajenn. Netra nemed rei da anaoud ha da gared ar peñ a gar e-unan. Ha deuet eo a benn. Greet e-neus eun dibab dispar euz ar peñ gwella a dleer da houzaud diwar-benn Iwerzon, Bro-Gembre, Bro-Skos, ha Breiz, o lennegez, o zud meur, darvoudou brasa o istor. Diskuilh a ra deom ive e zoñj war an darvoudou hag an dud.

All lenner ne vezo ket bepred a-du gantañ. Med eno ema eul lodenn euz ar bilja-
dur, o tarempred eun den hag e-neus e zoare e-unan da zelled ouz an traoù ha d'o barn, goude o displega buhezeg ha dedennuz. Eul leor da lakaad e levraoueg peñ Breizad c'hoant dezañ d'ober anaoudegez don gand ar Gelted tra-mor.

F. F.

Le Gérant : Abbé BLEUNVEN, Curé de Saint-Renan.
QUIMPER, IMP. CORNOUAILLAISE. — C.P.P.P. N° 21697





An Tad MANER